

An daou dort – Poelladennoù 1

1. Disparti ar gerioù hag adskriv ar frazennoù dindan.

a. Urwecheoadaoudort,NonnighaGabig,hageoantkamaradoùo-daou.

b. Sklaereoaalloorhagewelasandañserien-noz.

c. Pac'hoantaasNonnigmontkuitelârjontaneild'egile.

2. Gwir pe faos ?

a. Nonnig ha Gabig a oa daou gemener. _____

b. Klevet 'neva Nonnig mouezhioù merc'hed kozh en noz. _____

c. An dañserien-noz zo kornandoned. _____

d. Dañsal a rae ar gornandoned daou-ha-daou. _____

e. Nonnig 'neva aon deus ar gornandoned. _____

f. Dañset ha kanet 'neva Nonnig gant ar gornandoned. _____

g. Kontant e oa ar gornandoned pa 'na astennet Nonnig o c'hanaouenn. _____

h. Roet 'deva arc'hant hag aour da Nonnig evit trugarekaat anezhañ. _____

3. Kelc'h an diverradenn vat.

a. Nonnig a oa tort. Klevet a reas mouezhigoù o kanañ en noz. Pedet e oe da dañsal ha da ganañ gant dañserien-noz. Met n'eas ket gante peogwir e oa aonik. Aet e oa kuit goude.

b. Nonnig a oa tort. Klevet a reas mouezhigoù o kanañ en noz. Pedet e oe da dañsal ha da ganañ gant dañserien-noz. Dre ma oa re verr o c'hanaouenn 'neva astennet anezhi. Ne oa ket laouen ar gornandoned 'vat hag aet Nonnig d'ar gêr.

c. Nonnig a oa tort. Klevet a reas mouezhigoù o kanañ en noz. Pedet e oe da dañsal ha da ganañ gant dañserien-noz. Dre ma oa re verr o c'hanaouenn 'neva astennet anezhi. Laouen e oa ar gornandoned ha lamet 'deva e dort da Nonnig.